

( ton : In cordis jubilo )

Diskan!. Tridomp gant levenez:

Jezuz a zo leun a vuhez,  
Kanomp Alleluia!

1. D'an trede deiz ez eo savet - Alleluia  
Evel m'en devoa diskleriet - Alleluia (bis)
2. Trec'het en deus war an Ankou      12. "Lakit ho piz em femp gouli  
Brevet en deus e chadennou                Na jomit ken da ziskredi"
3. Merc'hed a oa aet mintin-tre      13. Tomaz a gouezas d'an daoulin  
Da valzami Korf Mab-Doue                    'N eur larout:"O va mestr divin"
4. Ne oa er bez korf ebet ken      14. "Eürus ar re o deus kredet  
Beo-buhezek e oa Mab-den                   Araok zoken beza gwelet
5. Daou abostol,p'o deus klevet      15. Kanomp hep paouez da Jezuz  
Buan d'ar bez o deus redet                Kantikou drant ha dudius !
6. Sant Yann, skanvoc'h e zivesker  
En em gavas araok sant Per
7. Eun ael e gwenn 'laras d'ezo:  
Ho Mestr karet n'eo mui maro
8. D'e ziskibien 'n em ziskouezas:  
"Ar peoc'h ganeoc'h!" a lavaras.
9. Sant Tomaz ne oa ket en ti  
Ha ne blege ket da gredi.
10. Eun deiz ma oa ganto Tomaz  
Jezuz adarre a zeuas
- 11."Gwelit toullet gant an houarn  
Va zreid,va c'hostez,va daouarn"

